


## Paotrezed ar Skol Gristen

Da veza kanet e daou bennad

pa vez nebeut a amzer



Buan ag buezek

Ni zo po - tre - zed iaou - ank kas - set d'ar skol gris -  
 ten kas - set d'ar skol gris ten Da zes - ki ar ski -  
 an - chou ar fur - nez ar be - den.

DISKAN

Ni ia en dro di - zour - si braz ag di - nec'h  
 Ni ia en dro di - zour - si braz ag di - nec'h a - tao.

I

Ni zo potrezed iaouank — kasset d'ar skol gristen, (bis)  
 Da zeski ar skianchou, ar furnez, ar beden.

DISKAN

Ni ia en dro  
 Dizoursi braz ag dinec'h,  
 Ni ia en dro  
 Dizoursi braz ag dinec'h atao.

## II

Abredik diouz ar mintin — da zeiz heur pe vardro  
E teu hor mamm da grial : « Allo ! Jeannik var-zao ! »

## III

Ag kerkent en eur roc'hat e savomp a ruillou,  
Ema gwisket an dillad, ag gwale'het ar ginou.

## IV

Draillet eur pennad *Pater* — ag eur pennad *Ave*  
E lounkomp eun tam souben pe eur banne kafe.

## V

Neuze dre bep seurt amzer, pa vije dour-buill-c'hlaou,  
Ep gina nag damanti, krog er baner, ag iao !

## VI

Er goanv pa vez re ien, ag ruz-tan ar friou  
Ne jomer ket da dortal var c'horre an hentchou.

## VII

Goulskoude meur a hini a zale divarlerc'h  
D'en em beillat gant boulou pe gant bolomou erc'h.

## VIII

En anv pebez plijadur mont dre ar parkeier  
Ag klevet al laboused o kana d'ho C'hrouer !

## IX

Pa vez re dom an eol da zeski kenteliou  
E karjet chom er gear gant ar bapaïkou.

## X

Allas ! mamm-goz a lavar : ar re ne zeskont ket  
A deu hir ho diskouarn evel an azennet !

## XI

Setu ne vankimp biken, ep damant d'ar boân  
Ni deï d'ar skol, pa rankfemp bale var hor c'hrabân.

---



---

**EIL PENNAD**

Er skol pebez { cholori, } pa deu ar vestrez-skol  
{ touloumpi }

D'ober dikté ag kalkul, ag a bep seurt traou-drôl !

XIII

Ar c'hatekis, an « dessin », histoar ag jeographi  
A veac'h ma vez amzer da c'hueza mad ar fri !

XIV

Betek ma veler souden an or o tigeri :  
Ag dao er meaz, d'an daoulam, da vic'hal, da c'hoari !

XV

Da lamet dreist ar gorden, pe da c'hoari loto  
Spillou, kraon, ag boloden, koukouk ag domino !

XVI

« Va Doue, pebeuz micher 'vid hor mestrezed keiz,  
» Skolia eun toull guenann, o voudal 'pad an deiz !

XVII

» Grit d'ezho 'n ho paradoz, eur mellad kurunen  
» Ken braz, ken teo, ken pounner, ken a blegint ho  
[fenn. »

XVIII

Ag ni potrezed iaouank, poaniomp oll d'ho c'haret  
Mestrezed mad eveldho 'zo rouez braz er bed !

XIX

Gantho ag hor beleien, — ag hor mamm ag hon tad  
Dre skeul bralluz an Envou, ni zesko galloupat.

XX

Respet ag doujans dezho ag stagomp d'al labour  
Araok ma vimp en oad da vont da blanta pour.

XXI

Echuomp en ho honor o krial gant joa  
Evel ma ra ar Zaozoun : « (1) *Hip, hip, hourrah!*  
[*hourrah!* »

PAOT TRÉHOURE.

*m. Bong, vicaire à St Pol.*

(1) An dra-man dleer da grial e leac'h kana.



17091 — Brest, moullerez ru ar C'hastell, 4

